

YF_0045_Konskried Sant-Trifin v.1

Na disul e Sant-Trifin goude an overenn-bred
O tond er-mez deuz an iliz ma halon a oe semplet

O kleved an aotrou maer war eur men o lared
« Erru eo ar mandaïou partian ar gonskried »

An tadou hag ar mammou a ouele d'ho pugale
Hag ar gonskried yaouank lare kenavo d'egile

Hag ar gonskried yaouank an eil d'egile a lare
« Arsa 'ta kamaraded partiañ a vezo red »

Kant daouzeg ha tri-ugent oemp deuz ar Vretoned
Asamblez e-barz an tren gand an hent o voned

D'ar c'houlz-se ni a gane gand eur halon kontant
Setu breman kamarad a zo deuet chenchamant

Breman ni a voe komandet gand chefou an arme
Kerhad ein e ve reiñ ket d'ober an daou gostez

Kerzet dezi e vo red deom d'or ha gwir emamp da lared
Kar d'an hini a rouspeto, en a vo puniset

An deiz warleh d'ar beure e-leh mond d'ar hafe
E tapem-ni ar skubelenn 'vid mond d'ober c'horve

Ha pa oe graet ar c'horve, antreet e-barz en kambr
'Benn eur pennad goude-se, erru ve ar serjant

« Arsa 'ta soudard yaouank bet oh en eksersis
Ma ve ket astiket mad c'hwi 'po sal' de police »

Konsign ha sal' de police oe deom-ni akordet
Ha kousket war ar plankenn se a zo kriz ha kaled

Ha kousket war ar plankenn se a zo kriz ha kaled
Nag evid boud e Sant-Trifin o vouched d'ar merc'hed.